

M. Denier, a approuver / avec l'aveu
I
n. 5

HISTOR EUS A VUEZ
SANTES BARBA, *64*

*Pehini so mat da veza reclamet oc'h
ar maro subit.*

ME ho supli, Compagnunez,
Da felaou cana ar Vuez
A Santes Barba benniguet,
A so a nevez composer.

Er bloaz daou c'hant hac anter-cant,
Dindan Maximin an Tyrant,
Eus a Noblanç bras meurbet
E Nicomedi e oue ganet.

E Zut a yoa Idolatret
A gorf, a galon, a speret;
E Zat d'ar Gristenyen garo,
A re o lacât d'ar maro.

Mæs ar Verc'hes Santes Barba
Nemet Jesus ne gar netra;
Christenes e voa evit certen,
Ha fouten bras d'ar Gristenyen.

Oc'h e beza caër meurbet,
Gant ur Prinç bras oue goulennet,
Hac e voa gantâ desirer

A

Evit e gaout da Bried.

He Zad a gommandas dezi
 Accepti fouden ar parti ;
 Mæs hi a respontas neuse
 Ne rafe jamæs an dra-se.

O songeal gallout e dompti,
 Gourc'hemen a eureu dezi
 Antren en un Tour er prison,
 O clasq e rengi d'e ræson.

Eno e cavas Doue he Zat
 A ranverfas gant un taul troad :
 Da Jesus-Christ en em roas
 Corf hac ene a galon bras.

Ar c'homsou-mañ a lavaras :
 Jesus so maro er Groas,
 Voui a ran d'ho Majeste
 A galon ma Virginite.

Neuse-fouden dre Miracl bras,
 Sin ar Groas quen don a gravas
 Gant he bes en ur mean calet,
 E effaci ne alle quer.

Goudefe e commandas prest
 Ma vise great tri prenest
 Evit enori an Dreindet
 A gare a galon parfet.

He Zad an dra-se pa velas,
 Ouz ar Santes a c'houlennas :
 Petra sinifi quemense
 So great dre hoc'h autorite?

Evit enori an Dreindet
 O ober am-eus commandet;
 An Tad, ar Map, ar Speret-Glan
 A so tri Ferson en unan.

Tri prenest so var ar prison,
 Un Doue so e tri Ferson,
 Mæs va entent ne allet quet,
 E deffot beza badezet.

Va Zad, pa em-eus commancer,
 E livirin deoc'h ur secret:
 Cridi a ràn e Jesus-Christ,
 Ha drouc a ràn-me ma zouc'h trist?

Souezet omp oc'h o quelet
 Entrezoc'h, c'hui Idolatret,
 Ouz o quelet oc'h adori
 Doueou great gant mein ha pri.

Me ne ràn quet a istim bras
 A Jupiter nac a Pallas;
 Satan en deus-y invantet
 Evit coll ar bopl eus ar bet.

Ur re a so Egyptianet
 Hac a ador ar Serpantet,
 Ispicial ar C'hrocodil
 A so voar Rivier an Nil.

Darn-all a ador un Egen,
 Un fort-all a bed un Azen,
 Hac an dut a Alexandri
 A ador ar c'has hac ar c'hi.

Entrezomp-ni oll Christenyen;

A ij

A ador un Doue mui quen,
 Pehini fo an Autrou
 Eus an Douar hac an Eêvou.

Ho pet, abalamour da Zoue,
 Ho pet truez ouz hoc'lr ene;
 Lest al Lezen-se milliguet,
 Peautramant e viot daonet.

He Zad neufe pa e c'hlevas,
 Dre ur goler vras a respontas:
 Effrontet out en assuranc
 Coms er fæçon-se em presanc.

Ya, ret eo assuramant
 E pez-te collet da squiant,
 Adori un den fo crouguet
 Evit crimou hep mar ebet.

Va Zad, lequeat voa d'ar maro
 Gant ar Yusevien en e vro;
 Mæs, va Zad, ne ententet quet,
 Pa ne vet-se e voamp oll collet.

Da hennez en deveus va frênet,
 Va Zad, ezon-me demezet;
 Brassoc'h Mæstr eo assuramant
 Evit Maximin an Tyrant.

Henez en dêus great a netra
 Quement a velomp er bed-mâ,
 Hac a roi ur plaç a repos
 D'ar Gristenyen er Barados.

Mæs ar re ne gredint ennâ,
 Pa zui da varn ar bed-mâ,

O c'hondauno d'an tan griffas ;
N'en dêus poan ve quen divlas.

En ur goler e antreas ,
E gleze diountàn a dennas ;
E zreufi a fallas dezàn ,
Mæs Doue a viras oountàn.

Redec a eureu var e lerc'h ,
Mæs ur roc'h guen evel an erc'h ;
Evit e c'honservi antier ,
En em digoras dre an anter.

Goudefe voa quemeret ,
Ha gant querden amarret ,
Ha d'ar Prefidant Marcian
He Zad e livras ehunan.

Ar Prefidant pa e guelas ,
Oc'h ar Santes a c'houlennas :
Din-me prontamant livirit
Pe fort Doue a adorit ?

Credit-hu certen , Prefidant ,
Christenes oun assuramant ,
Ha ne dêus aour na tourmant
A alle fench va santimant.

O Toueou n'o dêus quet a c'hallout
Na da ober na mat na drouc ,
Rac-se ezeo bras ho fazi
Laquat ar pobl d'o adori.

Souefet bras oun-me gueneoc'h ,
Va merc'h , truez am-eus ouzoc'h ;
Quiteet ho Lesen affo ,

Peautramant ezoc'h maro.

Mar quirit sencla a santimant,
 Me roi deoc'h aour hac arc'hant,
 Hac ur Prinç bras da Bried
 Ho caro a galon parfet.

It ganto e perdition,
 JESUS eo va zenfor guirion:
 Bras ve an den ambitius,
 Ma na ve contant a JESUS.

He Zad neuse, pa e c'hlevas,
 D'ar Presidant a lavaras:
 Autrou Presidant, grêt justiç,
 Rac houmâ so leun a valiç.

Rac-se grit justiç, me ho ped,
 Ha dezi ne faziet quet,
 Pe me scrifo a dra certen
 Ezoc'h evit ar Gristenyen.

An Impalaër dre e Arret
 A ordren ma vezint losquet;
 Mar faziet, credit erfat
 Ezoc'h sur da goll ho stad.

Neuse-fouden voa divisquet,
 Ouz ur pilyer e voue staguet,
 Ha dispennet gant scrifellou,
 Ma coueze he c'hic a beziou.

Un horrol bras voe e guelet,
 He goad virginal o reded,
 Ha ne voa den bras na bihan
 Ne guelfont oll guitibunan.

Goude d'ar prison voa casset,
 E bassefos e voa lequet,
 O clasq dont a ben anezi,
 Autramant e disesperri.

Neuse-souden voe visitet
 Gant Jesus-Christ Salver ar bed,
 Pehini en ur douich outhi
 A eure falo anezi.

Barba, va merc'h, ho pet couraich,
 Rac ar Presidant a arraich
 Ouzoc'h, e deffot va c'huitat
 Da adori Doueou ho Tad.

JESUS, n'am abandonet quet,
 Mar plich gueneoc'h, va ficouret,
 Ma illin fouten constamant
 Evit ho cloar bep fort tourmant.

An Heul, al Loar hac ar Steret,
 A vez quent mil gueich distruget,
 Hep quen ma fazien deoc'h,
 Ha n'am be sourci ac'hanoc'h.

An eil ternos e voa tennet
 Evit beza interroget,
 Hac e voa roet dezi da choas
 Renonç, pe tourmanchou bras.

Hi fortifiet gant Doue,
 Prest a respontas d'ar Roue:
 Lavaret am-eus deoc'h dija
 Va santimant, hep nac'h netra.

Birviquen jamæs ne senchàn

Ar pez a lavaràn brémàn ;
 Va JÉSUS a fo em c'halon ,
 E Varo hac e Bassion.

Hac a vezo da virviquen
 Evit nep glac'har ha nep anquen ;
 Rac-fe , Tyrant , depeich affo ,
 Deus d'am c'hondauni d'ar maro.

An Tyrant-fe gant e arraich
 A laquas dispen he bifaich
 Hac ar c'hic divar he c'hostou
 Gant cribou houarn ha scrifellou.

Gant goulouennou allumet
 He gouliou a voa rostet ,
 Hac he divron a unanou
 Distaguet gant ar rasouerou.

Tennet voa goude en noas-beo ,
 Goloet hepquen gant he bleo ;
 Gant ur goabren guen meurbet
 E goloas Salver ar bed.

Var he fen an tauliou morzol
 A scoë gant quer bras horrol ,
 Ma crene memes ar pave
 Gant an tauliou a receive.

Pa velfont ne allent quet outhi
 O dêus songet e c'hondauni
 D'ar fin da veza dibennet
 Voar ur chaffot voa drestet.

Ar Bourreau gant truez outhi
 Ne zibenne quet anezi ;

He Zad, Bourreau ar c'hruela,
En em offras d'e dibenna.

Neufe e eure ur beden
Da Zoue evit ar Gristenyen,
Ma pliche da Salver ar bed
Accordi dezi ur requet.

Goulen a eure ouz Doue,
Evit piou-bennac e fedse,
Ne varvo quet subitamant
Abars receo ar Sacramant.

Un Æl neufe a apparissas,
Ha d'ar Santes a lavaras:
Barba, n'ho pe douetanç ebet;
Accordet eo deoc'h ho requet.

Ur Gurunen a c'hloar a zougàn
Bremâ-fouden d'ho curunàn,
Rac prest oc'h da vont da velet
Doue, ar Sent ha Santefet.

Un taul Cleze digant he Zad
A zispartias evit mad
He c'horf eürus diouz he fen,
Hac e lammas a bep anquen.

Un taul gurun dioc'h an Eê
A foueltras he Zad goudefe;
Quement-all evit paeamant
A c'hoarvezas gant an Tyrant.

F I N.



CANTIC SPIRITUEL

EVIT AN ANAON

*Retardet er Purcator, voar un Ton
nevez.*

NObl ha partabl, coz ha yaouanc,
So er bed en hoc'h æfamant,
Gant ar madou deoc'h dastumer
Gant nep so goude tourmantet.

Ne songet quet er boan cruel
A anduret goude mervel,
Ma na ve grêt guir pinigen
Abars ar maro pen-da-ben.

Ho tud, querent ha mignonet
Cals evidoc'h o deveus grêt,
A gri, a c'houlen er flammou
Er Purcator ho pedennou.

Mar doc'h quer cri a galonou,
Pa na gredet quet o foaniou,
Clevet un exempl raportet
Gant nep a so bet o velet.

Santes Christina el lavar,
Retornet bet var an douar
Da anduri poaniou garo,
A fepetans o delivro.

Pa voe he c'horf d'an Ilis casset
 Da enterri gant peb respet,
 E presañc compagnunez vras,
 Savet eus e arc'h e laras.

N'em boa quet a retardamant
 Ne voàn bremâ, m'em bife c'hoant,
 Carguet a joa er Barados
 Gant ar Guerc'heset da repos.

Pa voa ma Ene partiet,
 Gant an Ælet e voàn casset
 Da velet ur plaç du ha tenval,
 Carguet a boaniou ha glac'har.

O veza fouezet meurbet,
 O velet ar poaniou diremet,
 E c'houllis hac an Ifern e voe
 Digant an Ælet am c'hasse.

Salocraç, eme an Ælet,
 Ar Purcator eo a velet;
 Deut da velet an Ifern bremâ,
 Differañc poaniou d'ar re-mâ.

Incontinent e voàn casset
 Da velet an Ifern milliguet:
 N'en dêus teaut den var an douar
 A zifclerie e fort gounar.

P'am boa guelet ar poaniou griez,
 Ha cals eus ma anaoudeguez,
 Dirac Doue e voàn casset,
 Dridal a ris oc'h e velet.

Va merc'h vat, eme va Doue,

Ma Barados fo sur dide
 Eus a vremâ meritet mat
 Gant ar verc'het a œuvrou mat.

Er Purcator oc'h-eus guelet
 Allas! cals a eneou poaniet,
 Goulen a reont foulageamant,
 Den anezo n'en dêus damant.

Mar queres retorn e buhe
 Da ober pinigen evite,
 Me roi did nerz ha ficour mat,
 Da recompañ a vo hanat.

Hac e zon retornet e buhe
 Dre gompaffion am boa oute,
 Ha da rei avertiffamant
 D'ar bec'heryen d'en em amand.

Rac-se na vea den fouezet,
 Ar pezh biscoaz n'oc'h-eus guelet
 A rin er bed abers Doue
 Da zilivra an Anaon-se.

Quer buhan Santes Christina
 A lavaras adeo d'ar bed-mâ,
 D'ar pec'het ha d'ar bec'heryen,
 Evit commañ ar binigen.

Gant an douar ne alle quet
 Chom equichen pec'her ebet,
 A ziabell hi a sante
 Ar stad dangerus aneze.

Die ar vertuz eus a Zoue
 E begou ar guez en em leque,

E begou an. Tourou huela
D'ar pevar avel da foueta.

Ur veich he zud gart i nec'het,
O songeal e voa disquianter,
Pe gant an drouc-Æl possedet;
E lequeas er prison ezreet.

Hep rei dezi tam na banne,
Queit ha ma voa dalc'het ene;
Mæs hi a eure he feden
Da bidi Doue d'e fouten.

Dre viracl o leis a læs
A savas e divron ar Santes,
Pe gant hini en em vague
Queit a ma voa er prison-se.

Pa voa dilivret ac'hane,
Spintet er burzut erguisse,
En em daule e creis an tan
Er fournesou da gaout poan.

Ha pa gorret ur forn bennac,
En em blante aratos mat
Ebars da lesqui, da zevi,
En ur grial ha deplori.

Ha pa fortie eus an tan,
En em gave yac'h quer buan,
Goude ar fort anquen andurin
Dre ar bermission divin.

Pa vele cauter o virvi,
Nac ober ligeou e nep ti,
En em taul ebars voar he fen

Da baredi quic ha croc'hen.

Pa velle en douar fornet
Ar frim, sclaç, an douar cleret,
Voar ar c'hler en noaz e chomme
Ahed ar pemp hac ar c'huec'h de.

Pa dremene ar milinou,
E ze er purrot aveichou,
En em leque ebars a huen
D'an dour d'e c'hanna corf ha pen.

Dre ar vertuz oc'h a Zoue,
Anezi ehunan en em boulse
Er vilin etre an daou væn,
Da vala he c'horf pen dre ben.

Hi a ye alies en nos,
Pa vife ar re-all o repos,
Voar ar rot ecreis ar blacen
Ma torret an torfetouryen,
Ehunan evit en em grevi
Ha terri he oll hisili.

Da ze marc'hat, var greis an de,
Oc'h ar potanç en em grougue,
Ha gant al laëron evelle
An daou, tri de e chomme.

Neuse ar gorden a dorre,
D'ar forestou en em dransporte
Da ober pinigen neve
Emesq ar stroez, loenet goue.

En Ilifou, er bezyou,
Alies etouez ar c'horfou

Eus an dut varo en em blante
 Da gaout ar fier aneze.

Etouez peb fort vileni,
 Da vouela ha da zeplori,
 En em dalc'h ahed ar bet,
 O velet Doue offanser.

D'an anter-nos e custume
 Sevel da vonet da vale,
 En ur youal en noaz beo
 Da c'hervel ar chas d'e zago.

Pa vize roguet, dispennet
 Gant ar chas en nos, e guelfet
 Oc'h en em ruillal, em ftelegeo
 Dre an henchou lous ha garo.

Ha n'en deo poaniou ar re-màn,
 Mar boa bilcoas guelet er bed-màn,
 A guemere ar Santes-màn,
 Daou bloaz daou-uguent hep heàn?

Ya, Christenyen, ahed queit-se
 Ar Barados a ziouere,
 Hep caout quen occasion
 Nemet truez oc'h an Anaon.

Credomp erfat dioc'h quememàn
 N'en de quet neubeut eo ar boan
 A ra Doue da anduri
 Er Purcator da peb-hini.

Ha quemeromp compassion
 Oc'h an Anaon gant guir ræson,
 Ha Doue a vezo truezus

En hon andret viont cablus.

Pedomp evito calonec,
Evel a garremp e ve grêt
Evidomp-oll, pa vezo ret
Monet d'ar poaniou hevelep.

F I N.

Pedit evit an Anaon.